

War don: An tri Angelus

I

An tad-Koz

Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig
 Dorn ouz dorn eomp hon daouig
 Da bourmen war ribl ar wazig,
 Barz an draouienn dôn;
 Ni a gutuilho bleuniou gwenn,
 Bleuniou glas ha bleuniou melen,
 Ni a selaouo kanaouenn
 Ar goulm d'he mignon;_
 Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig
 Dorn ouz dorn eomp hon daouig
 Da bourmen war ribl ar wazig
 'Barz an draouienn dôn.

Diskan ar bugel

Deomp ta, deomp ta hon daouig,
 Dorn ouz dorn eomp goustadik
 Da bourmen war ribl ar wazig
 Barz an Draouienn dôn

2

Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig,
 Dorn-ouz-dorn, kerzomp hon daouig,
 Da vale war lein ar runig,
 'N harz ar pin uhel;
 Alese ni 'welo touriou,
 Ni welo kestel ha kêriou.
 Hag an dud gant o labouriou,
 War ar mêziou pell.
 Deus 'ta...

Diskan ar bugel

Deomp 'ta, deomp 'ta hon daouig
 Dorn ouz dorn, eomp goustadik
 Da vale war lein ar runig,
 'N harz ar pin uhel.

3

Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig
 Dorn-ouz-dorn, kerzomp hon daouig
 Trezek ar vouez a gan flourik
 E tu all d'ar roz;
 Kloc'h an tour a gas d'imp kelou
 Men hirje diskuiz ar suliou;
 D'an iliz kas o c'hammejou
 Holl yaouank ha koz.
 Deus 'ta...

Diskan ar bugel
 Deomp 'ta, deomp 'ta hon daouig
 Dorn-ouz-dorn, eomp goustadik
 Trezek ar vouez a gan flourik
 E tu all d'ar roz.

4

Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig
 Dorn-ouz-dorn, kerzomp hon daouig;
 Endro d'imp an deiz, goustadik,
 A gloz e valvenn...
 Ni yelo dindan ar stered,
 Ni welo al loar 'n he splannded,
 Ha dirak ar bed 'n e c'hened,
 Ni savo pedenn.
 Deus 'ta..

Diskan ar bugel
 Deomp 'ta, deomp 'ta hon daouig
 Dorn-ouz-dorn eomp goustadik
 Endro d'imp an deiz, sioulik,
 A gloz e valvenn..

5

Deus 'ta, deus 'ta, ma mabig,
 Dorn-ouz-dorn, kerzomp hon daouig,
 Na gollomp nag eur na predig,
 Arôk ma vo noz;
 Souden, ar vuhez az kalvo,
 Souden, ar marv am diskaro,
 Hag hon daouarn 'n em diskoulmo
 Ken er baradoz.
 Deus 'ta..

Diskan ar bugel
 Deomp 'ta, deomp 'ta hon daouig
 Dorn-ouz-dorn, eomp goustadik;
 Na gollomp nag eur na predig
 Arôk ma vo noz.